

**DEUS GANIN 'TA, MA MESTREZ***Viens donc avec moi, mon amie*

Deus ganin 'ta, ma mestrez, da zegas ar saout er-maez O, feiz, ya, me n'an ket 'ta, ma c'hoar a zo aet d'al laezh	<i>Viens donc avec moi, mon amie, sortir les vaches Oh, mais certainement, moi je n'y vais pas, ma sœur s'occupe du lait</i>
Deus ganin 'ta, ma mestrez, da hejañ avaloù O, feiz, ya, me n'an ket 'ta, rak me am bo bazhadou	<i>Viens donc avec moi, mon amie, secouer les pommiers Oh, mais certainement, moi je n'y vais pas, car j'aurai des coups de bâton</i>
Deus ganin 'ta, ma mestrez, o ya, da hejañ prun O, feiz, ya, me n'an ket 'ta, me a dorro ma c'hein	<i>Viens donc avec moi, mon amie, oh oui, secouer les pruniers Oh, mais certainement, moi je n'y vais pas, je me casserai le dos</i>
Deus ganin 'ta, ma mestrez, o ya, da hejañ per O, feiz, ya, me n'an ket 'ta, toull eo ma zavañjer	<i>Viens donc avec moi, mon amie, oh oui, secouer les poiriers Oh, mais certainement, moi je n'y vais pas, mon tablier est troué</i>
Deus ganin 'ta, ma mestrez, o ya, da droc'hañ kerc'h O, feiz, ya, me n'an ket 'ta, rak me a chomo war-lerc'h	<i>Viens donc avec moi, mon amie, oh oui, couper l'avoine Oh, mais certainement, moi je n'y vais pas, car je resterai derrière</i>
Deus ganin 'ta, ma mestrez, o ya, da droc'hañ foenn O, feiz, ya, me n'an ket 'ta, echu eo ma c'hanaouenn	<i>Viens donc avec moi, mon amie, oh oui, couper le foin Oh, mais certainement, moi je n'y vais pas, ma chanson est finie</i>